

Ton Savet Gant An Act Bayet



SOAZIG

E miz mae pa vez an heol skler pa gan
ar voualc'h an al-choue - der E sa -
vas Soa-zig min-tin mat Ha bu -
- an wis-kas he dil - had

I

E miz mae pa vez an heol skler
Pa gan ar voualc'h an alchoueder
E savas Soazig, mintin mat
Ha buhan 'wiskas he dilhad.

II

Koef lien war he bleo melen
Brozig marellet, lerou gwen :
Ha da redek dre ar parkou
Da gutuilh a bep tu bleuniou.

III

Skand ha laouen, glebiet he broz
E mesk ar geot, gant ar gliz noz,
O ! ni'ho pige gwelet Soazig.
Doue ! Koantat moa ar plac'hig.

IV

Ar c'helien-aour, ar melvennou,
Kenkouls hag an evnedigou,
A zarnije a-uz d'he fenn
Pephini gant he c'hanaouenn.

V

Ma lavarant d'ezi : « Deiz mat !
« Deiz mat, plac'hig, Ken hanv a
[droad
« Vidout eo ken kaer ar bleuniou
« Vidout e kanomp hor soniou. »

VI

Hag an heol-sko, ouz e gwelet
Ker koant, ker koant, ar souezet,
Ha mezek, me gred, oun tammig
Trech'et ma oa gant eur plac'hig.

VII

Skand ha laouen, glebiet he broz
E mesk ar geot, gant ar gliz noz
O ! m'ho pige gwelet Soazig
Doue ! Koantat m'oa ar plac'hig.

F. V. an UHEL.

Bepred Breizag.

